

Al Lae Fañch. Ar morvran

An oabl ‘zo koumoulet, strakal ‘ra ‘hurunou !
Avel gwalarn a yud, en kribenn ar hoummou,
Hag ar mor dirollet a freg war ar reier,
Eonennet, gwenn-kann, e houlenou pounner.

Bran-vor war da garreg, petra ‘ rez-te aze ?
Bremaig en taoliou-mor, da gory maro a ruillo !
Sav war da ziou askell, nij pell euz al leh-se,
Nij buan d’an torraod : da vrini a hortozo.

-« Petra ‘ra din-me ‘n avel diroll
A youh en toullou ar herreg,
Na kennebeud boubou an houl¹,
War an aotchou bilienneg ?
Ma fluñv ‘zo flour, kreñv ma askell,
Ne vern ket yudfe ‘n avel !

« Petra ‘ra din-me ‘n tarz kurun
A groz en neñvou spouronet !
Al luhed a varv va fluñv²
Ar hurunou n’am spontont ket !
E-kreiz ar mor war ma harreg
Me a zo drant ha leveneg !

Fañch Al Lae

Notennou : 1 : skrivet « hol », evel-se e rim.
2 : Al luhed a varv va fluñv : « a varv » a zo souezuz.